

...Kenskoazell hag Ekologiezh

GOUDE AN DOUR, AR BOUED

LO vloaz zo dija e kroge Monik Guillou hag he nignoned eus Bretagne Solidarité Maasai da bleidiñ gant kudenn an dour. 10 vloaz goude, tapet m'eo bremañ ar boblañs gant gudennoù e-liamm gant ar boued ne labouront ket mui war ar memes tachenn.

Eno, e Bro-Genya, n'eo ket ar nemes mod hag e Bro-C'hall da stourm eus ar C'hovid-19." eme Monik Guillou. Eus an eil deiz d'egile eo bet serret ar stalioù ha lakaet dilabour an holl gelennerien. Serret eo bet ar marc'hadoù. N'eus ket nui a werzh, nag a arc'hant, nag a eskemmoù, na mui tetra da zebrñ. "Un tamm skoazell etrebroadel a vez resevet ganto met mont a ra diouzhtu da gêr-lastez* (Gibera, e bannlev Nairobi rak an o deus ar gouarnamant eus an reuz a c'hellfe sevel eno diwar ar baourentez. Padal gant ar bobl Maasai n'eo ket ar gudenn." emezi.

Kudenn an dour

En ur gêriadenn, Essosian, dezhi ur skol kentañ derez a 500 bugel zo bet toullet ur puñs betek 60 m donder ha savet kement savadur a oa ezhomm evit lakaat anezhañ da dalvezout (pomp, mirlec'h...) Gortoz a reer bremañ e rafe Kenya Power (par da EDF) e labour skourrañ ar c'horzennoù. E Enkusero o deus lakaet toullañ ur foz war 4 c'hilometr evit lakaat dour o tont eus ar menez Kilimanjaro d'ar gêriadenn. Abaoe bloaz int aet war-zu raktresoù all, sikour da sevel ur skol evit 300 bugel, sikour da broduiñ legumaj (karotez, kaol, kafe...)



War-zu ar reter

P'o deus kroget da sikour e kenlabourent gant Kenny Matanpash, ur Maasai eus ar c'hornôg tro-dro da gudennoù an dour. "Met gorrek-tre ez a an traoù eno. E 2012 e oan bet war al lec'h evit ar wech kentañ ha n'eo bet echu ar puñs nemet e miz Meurzh 2020. N'omp ket bet di abalamour d'ar c'hleñved-red."

Bremañ o deus skoulmet darempredoù gant Moses ha Naomi, ur c'houlblad o chom e Enkusero, 4 eurvezh hent war-zu ar reter. Eno o deus staget ivez gant kudenn an dour. E kêriadenn Ncousero zo bet staliet ur c'hiosk-dour, un tamm lochenn gant un den o werzhañ dour d'an dud, 3 *kenyan shilling* evit 20 litrad. Met setu deuet muzulioù nevez da heul ar C'hovid-19. Ezhomm a zo eus 90 000 € evit padout 9 miz, betek ma krogfe ar plant da zont er-maez, goude ar glaveier. "Met n'omp ket gouest da gas kement-se a arc'hant" eme Monik Guillou. Ranket zo bet marc'hata. Arboellet

e vo ar boued ganto. Sellet e vo pishoc'h. Ha diskennet ar goulenn da 10 000 € a vefe da gas diouzhtu, peadra da sikour 70 familh e-pad ur miz.

Gervel

Kerkent o deus kaset o mignoned e Kemper ar pezh o doa, 3700 €. Ha kroget gant klask ar peurrest, 6300 €. Respontoù a zo bet d'o galv, un tamm, met ne vez ket kavet diskoulmoù diouzhtu. E miz Gwengolo, marteze, pe c'hoazh e 2021... "Maer ar vro, eno, en dije c'hoant e vefe tennet gounid eus an enkadenn evit broudañ an dud da walc'hiñ o daouarn.

Met gant peseurt arc'hant ?" a embann Monik Guillou. " 16 600 € hon eus kaset dezho abaoe deroù ar bloaz, en o zouez 3 800 € evit staliañ korzennoù dour. Met ne c'hellomp ket ober gwelloc'h."

*kêr-lastez bidonville

1 Allée Monseigneur Jean René Calloc'h
29000 Quimper
contact@breizh-solidarite-maasai.fr